



Promotion et diffusion du cinéma en Bretagne
Lakaat war-wel ar sinema e Breizh

Bilañs ar 6^{vet} troiad filmoù-bevaat e brezhoneg

Miz Genver-Miz Even 2009

Ar filmoù

An droiad a blede gant daou programm filmoù-bevaat advouezhiet e brezhoneg gant Dizale.

Programm 1

Evit ar re vihan (kelc'hiadoù 1 ha 2), *Laban an tasmant bihan*, ur rummad filmoù-bevaat berr eus Sweden, graet gant Per Ahlin, Lasse Persson hag Alicja Jaworski.

N'eo ket aes bezañ un tasmant pa vezer spontet gant an denvalijenn... O chom e kav kastell Millaon emañ Laban an tasmant bihan, asambles gant e dud hag e c'hoar Labolina. En ur vont war glask e c'hoar pe en ur zizoloñ un euzhvil spontus e tesko penaos bezañ mestr war e aon.

Programm 2

Evit ar re vras (kelc'hiad 3 ha skolaj), *Kie, ar bikez vihan*, ar manga japanat brudet-mat, sevenet gant Isao Takahata.

Buhez ordin ar plac'hig Kie, eizh vloaz, e karter poblek Osaka.

Daoust d'he familh distabil a-walc'h e teu Kie a-benn d'en em zibab eus ar gwellañ : a-drugarez da sikour he mamm-gozh ha d'he c'hazh, e vez dalc'hmat o klask da gas preti he ziegezh war-raok.

An aozañ

Abaoe miz Gwengolo 2005, pa oa bet sinet ar c'hendivizad nevez gant Dizale, e ra Daoulagad Breizh war-dro skignañ ar filmoù ha kenurzhiañ an abadennoù. Dibaoe daou vloaz e vez graet ha skignet an dafar kehentiñ (ar skritelloù, ar fichenoù film hag an doser evit ar skolaerien) gant Daoulagad Breizh. Gant Dizale e vez roet an eilennoù BetaSP, DVcam ha DVD.

Fakturennet e vez ur priz ingal da bep bugel : 2,50 €.

Hervez al lec'h e vez aozet an abadennoù gant kevredigezhioù lec'hel pe gant Daoulagad Breizh war-eeun. War ziorren ez a ar rouedad skignañ abaoe 6 vloaz. Strivañ a ra Daoulagad Breizh evit kavout lec'hioù nevez.

A-wechoù zo bet goulennet ivez digant Dizale prestiñ an dafar skignañ ha mont da ginnig an abadennoù.

Aozet e vez an abadennoù er sinemaoù da gentañ ha 'barzh kreizennoù sevenadurel pe salioù plijus, dafar evit skignañ enne (luc'hvanner video). Feurmet e vez ar salioù neuze. Pa 'vez re bell ar salioù-se diouzh ar skol pe ma n'eus ket dioute, e vez aozet an abadennoù 'barzh salioù all hag e vez feurmet dafar skignañ. Ma n'eus ket tu d'ober mod-all e vez skignet ar filmoù er skol.

Kresket eo an niver a skolioù hag a vugale o deus bet kemeret perzh en droiad, e-keñver warlene. Aozet zo bet abadennoù tostoc'h diouzh ar skolioù na c'helle ket an dud mont d'ul lec'h all. Bugale zo o deus bet gwelet filmoù en doare-se evit ar wech kentañ er bloaz-mañ. E lec'hioù zo zo deut muioc'h a skolioù evit warlene.

Etre miz Genver ha miz Mezheven 2009 :

61 lec'h skignañ (+ 12 e-keñver 2008)

71 abadenn *Laban an tasmant bihan* (+ 17)

56 abadenn *Kie ar bikez vihan* (+ 9)

Lec'hioù skignañ : 17 sinema dafar video enne, 2 sinema hep dafar video, 19 sal dafar enne, 13 sal hep dafar, 3 skol dafar enne, 7 skol hep dafar

Arvesterien :

7 736 bugel e Breizh a-bezh ha Pariz

(1 136 bugel ouzhpenn e-keñver 2008)

5 124 bugel o deus bet gwelet *Laban an tasmant bihan*

2 612 bugel o deus bet gwelet *Kie, ar bikez vihan*

Bugale eus **144 skol** (+ 24) ha **5 skolaj** (= 2008)

Dihun, Divyezh ha Diwan.

● Penn-ar-Bed

Bilañs yael. Abadennoù bet aozet 'ba lec'hioù zo 'oa ket bet posubl warlene. Skolioù zo bet kemeret perzh en-dro er bloaz-mañ. Skol an Erge-Vras he deus gallet mont dre ma oa bet aozet an abadenn er gêr-se.

27 abadenn *Laban an tasmant bihan* (+ 6) ha 21 abadenn *Kie, ar bikez vihan* (+ 3)

25 lec'h skignañ (+ 6) : 9 sinema dafar enne, 5 sal dafar enne, 8 sal hep dafar, 2 skol dafar enne, 1 skol hep dafar.

2 lec'h skignañ nevez : Ti an Holl An Erge Vras ha skol Sant-Joseph Kemper.

3 060 skoliad (+ 537) eus 54 skol (+ 12) ha 2 skolaj (= 2008)

An aozadurioù

Kenlabouret e vez alies gant an emglevioù bro.

KLT en deus aozet ha kinniget an abadennoù e 6 lec'h (+ 3) (Montroulez, Kastell-Paol, Sant-Riwal + Kleder, Ploueskat, Lanmeur).

Sked en deus aozet ha kinniget an abadennoù e 3 lec'h (Brest, Plougastell-Daoulaz ha Lokournan).

Ti ar Vro Bro Leon en deus aozet ha kinniget an abadennoù e 3 lec'h (Lesneven, Plabenneg + Lanniliz).

Ti ar Vro Kemper en deus aozet ha kinniget an abadennoù e 3 lec'h (+2) (An Erge-Vras, Ti ar Vro Kemper ha skol Saint-Joseph Kemper).

Divyezh Landerne en deus aozet abadennoù Landerne.

Ti-kêr Karaez hag al levraoueg o deus aozet an abadennoù e Karaez.

Daoulagad Breizh en deus aozet ha kinniget an abadenn e 5 lec'h (Ar Gelveneg, Pont-'n-Abad, Tregon, Kraozon, Plozevet). Kinniget hon eus an abadennoù e 4 lec'h all ivez (Landerne, Kemperle, Karaez, Plozevet).

Kenlabourerien all

Emglev Bro Douarnenez, Gwarez Filmoù Breizh, Vauban e Brest, Ti an Holl Tregon, Sal Avel-Dro e Plozevet, Emglev Bro Vigouden, CLC Ar Gelveneg, sinema Le Grand Bleu e Karaez, CCAS Morgat, sinema La Bobine e Kemperle, sinema l'Even e Lesneven, sinema L'Image e Plougastell-Daoulaz, sinema Le Bretagne e Lokournan, sinema Le Majestic e Kastell-Paol, sinema Le Rohan e Landerne, Ti ar Yaouankiz e Montroulez, sinema Mac Orlan e Brest, sinema Le Club e Douarnenez, sinema Dauphin e Ploueskat, MPT An Erge-Vras.

● Aodoù-an-Arvor

Bilañs yael daoust ma'z eus un digresk bihan.

12 abadenn *Laban an tasmant bihan* (- 2) ha 9 abadenn *Kie, ar bikez vihan* (- 3)

11 lec'h skignañ (- 2) : 2 sinema dafar enne, 2 sal dafar enne, 3 sal hep dafar, 4 skol hep dafar.

2 lec'h n'o deus ket kemeret perzh : levraoueg Bear, sinema Benac'h.

1 132 skoliad (- 20) eus 21 skol

An aozadurioù

Kenlabouret e vez gant **Al Levrig** e Bro-Dreger (9 lec'h skignañ : Pempoull, Ploubêr, Perwenan, Pabu, Kawan, Lannuon, Gwengamp, Perroz, Plistin).

Daoulagad Breizh en deus aozet an abadennoù e Sant-Brieg. Goulennet hon eus digant **Dizale** prestiñ an dafar ha kinnig an abadenn.

Daoulagad Breizh en deus aozet an abadennoù e Rostrenenn.

Kenlabourerien all

Sinema Le Douron e Plistin, sinema Club 6 e Sant-Brieg, mediaoueg Rostrenenn, Skol Veur Gatolik ar C'hornôg e Gwengamp.

Mor-Bihan

Bilañs yael-tre. Aozet zo bet gant Emglev Bro an Oriant ha Daoulagad Breizh abadennoù tost ouzh ar skolioù na c'helle ket an dud cheñch lec'h. Lec'hioù nevez zo a zo plijus-tre, lec'hioù all n'int ket kement-se, met a-bouez eo memestra kinnig seurt abadennoù d'ar skolioù. Ur goulenn bras a zo.

24 abadenn *Laban an tasmant bihan* (+ 10) ha 20 abadenn *Kie, ar bikez vihan* (+ 7)

19 lec'h skignañ (+ 6) : 4 sinema dafar enne, 2 sinema hep dafar, 9 sal dafar enne, 1 sal hep dafar, 1 skol dafar enni, 2 skol hep dafar.

8 lec'h skignañ nevez : mediaoueg an Oriant (dafar enni), sal Strapontin e Pont-Skorf (hep dafar), skol Gwidel (dafar enni), skol Ploue (hep dafar), sal La Luciole e Ploermel (dafar enni), mediaoueg Kewen (dafar enni), sal ti-kêr Klegereg (dafar enni), skol Maoron (hep dafar).

An aozadurioù

2 504 skoliad (+ 595) eus 52 skol (+ 16)

Emglev Bro an Oriant en deus aozet ha kinniget an abadennoù e 7 lec'h (An Oriant, Pont-Skorf, Lannarstêr, Gwidel, Langedig, Ploue, Kewen ; aozet eo bet abadennoù Lannarstêr gante ha kinniget o deus abadenn Langedig).

Daoulagad Breizh en deus aozet peurrest an abadennoù e 12 lec'h (Sarzhav, Sant-Teve, Gourin, Baod, Gwened, An Alre, Josilin, Pondi, Maoron, Ploermel, Klegereg, Logunec'h).

Goulennet zo bet digant **Dizale** prestiñ an dafar ha kinnig an abadennoù e 5 lec'h (Lannarstêr, Logunec'h, Josilin, Ploermel, Maoron).

Kenlabourerien all

Cinéville Gwened, mediaoueg Lannarstêr, mediaoueg Langedig, Kreizenn sevenadurel l'Hermine e Sarzhav, sal Le Dôme e Sant-Teve, sinema Le Beaumanoir e Josilin, sinema Le Club e Logunec'h, sinema Le Celtique e Baod, sinema Les Arcades en Alre, sinema Jeanne D'Arc Gourin, sal La Luciole e Ploermel, mediaoueg Kewen, Ti-Kêr Klegereg, sal Strapontin e Pont-Skorf.

Il-ha-Gwilen

Bilañs yael. Mat eo e vefe bet aozet un abadenn e Sant-Maloù : dibaoe un nebeud bloavezhioù ne gemere ket mui perzh. Ofis ar brezhoneg ha Daoulagad Breizh o deus klasket aozañ un abadenn e Dinan, ha kavet ul lec'h, met 'benn ar fin, skol Diwan Dinan n'he deus ket kemeret perzh. 'Benn bloaz marteze.

4 abadenn *Laban an tasmant bihan* (+ 2) ha 2 abadenn *Kie, ar bikez vihan*

3 lec'h skignañ : 1 sinema dafar ennañ, 2 sal dafar enne

1 lec'h skignañ nevez : Kreizenn Salvador Allende e Sant-Maloù (dafar enni)

642 skoliad (- 31) eus 11 skol (+ 2) ha 2 skolaj (= 2008)

An aozadurioù

Skeudenn en deus aozet an abadennoù e Roazhon. Kinniget int bet gant **Dizale**.

Ar **skolioù** ha **Daoulagad Breizh** o deus aozet an abadennoù e Redon. Kinniget int bet gant **Dizale**.

Ofis ar brezhoneg asambles gant **Daoulagad Breizh** o deus aozet an abadenn e Sant-Maloù. Kinniget eo bet gant **Dizale**.

Kenlabourerien all

Sinema Le Manivel e Redon, ar Maezioù Frank e Roazhon ha Ti-kêr Sant-Maloù.

Liger-Atlantel

Bilañs yael. Mat eo e vefe bet aozet un abadenn e Gwennran. Dibaoe un nebeud bloavezhioù ne gemere ket mui perzh.

3 abadenn *Laban an tasmant bihan* (+ 1) ha 3 abadenn *Kie, ar bikez vihan* (+ 1)

2 lec'h skignañ : 1 sinema dafar ennañ, 1 sal hep dafar

1 lec'h skignañ nevez : Kreizenn Athanor e Gwennran (hep dafar)

348 skoliad (+ 37) eus 4 skol (+ 1) hag ar skolaj

An aozadurioù

Abadennoù aozet ha kinniget gant **Ajañs sevenadurel Naoned** hag **Ofis ar Brezhoneg Naoned** e Naoned. Goulennet zo bet digant **Dizale** kinnig un abadenn.

Daoulagad Breizh en deus aozet an abadennoù e Gwennran. Kinniget gant **Dizale**, gant e zafar.

Kenlabourerien all

Sinema Le Cinématographe Naoned.

2 abadenn (*Laban* ha *Kie*) a zo bet aozet e **Ti ar Vretoned** gant **Ti ar Brezhoneg** e Pariz, evit bugale ar skol Diwan hag o zud, ha perzhidi ar c'hentelioù-noz.

Avesterien : 50 den